

POBL VREIZH

3^L

MAE 1978

NIV.

100



PIW EN DEUS VOTET EWID BREIZH ?

« Qui a voté breton ? » Kement-se en em c'houlenne newez zo lenner ur gasetenn bemezigez strewet war gornog ar Frañs a-bezh. Hag ez eo bet mouletlet — gant mall, kredit hardizh ! — lizher al lenner-se (OF, 5/4/1978, paj. Finistère-Morbihan). Gant mall, rag, kaer 'vo lâred, n'eo ket emrenier eo a zo e penn OF, na tud eus an tu kleiz n'int ket kennebeud. Ha pa c'hellont e tiskaront an UDB.

Meur a respont zo bet kaset da OF. Unan zo bet embannet : heni Per Ar Gall, eus an UDB, o hom e Plougerne : « Reizh e seblant bezañ difennadenn an Ao. Ch.O., ar pezh ne sinifi ket ez eo lu pe didalvoud ar stourm ewid Breizh (an Ao. O. n'hell lavar ket fraezh, gwir eo !).

Med un nebeud ewezhiadennoù 'm eus d'ober dehañ :

1. Ewid bezañ talvoudus rik, e tie ur vot bezañ ur choas diasetez war an anaoudegezh eus meur a zivis, hogen :
 - al lodenn vrasañ eus ar Vretoned n'ousont netra diwarbenn istor o bro ;
 - lakaet int bet da zisprisoud ur yezh ha ez eo bet graet peb tra ewid ma ne servije homañ da netra er vuhez pemdezeg ;
 - n'eo deus peurlusañ eskiant ebet eus dilafas ekonomikel Breizh, nag eus ar pezh a laka anehi da vezañ ur « vengleuz a labourerien ».

Tri zra hag o deus o kaset da goll o fersonelezh, da vezañ dibersonelezet : n'eus forzh pelec'h all e vefe graet eus an dra-se « ur fed kolonial ».

2. N'int ket eta ewid merzhoud pegen pilpouss eo ar sistem a lak da vezañ gwir ewid ar broioù estren nemedken (Ar Chebek I) « an droed ewid ar pobloù d'ober ganto o hunan sort a garont », ha padal, diwar ur jakobinelezh spiann, e « kemmaer » n'eus er Frañs nemed ur bobl.

3. Re an tu kleiz, ar PS ispisial, o deus bet int-i iwe goulennet :

- ur gampr ewid kement rannvro, enni tud difennet war-eun gant an oll, ha dehi ur gwir c'halloud-rannvro ;
- musuladadoù sirius, ha n'eo ket ober van ewid kultur Breizh.

E-se en deus ar PS lamet mouezhioù digant an UDB.

Ne c'heller ket eta lâred ne sav ar mennoz rannvroel nemed da 3 % (rag ar ger « emrenerezh », eñv, a vez dilhefchet peurlusañ diouzh e stiz gwirion). Rag bez ez eus da gredif awalc'h o deus ar re o deus vot ewid an tu kleiz degemeret al lodenn vrasañ eus asgoulennoù 17 kandidad an UDB.

D'an 8/4 eo bet embannet al lizher-mañ.

D'an 11/4 e kasse F. Kerrain e heni (n'eo ket bet embannet) :

« Emaon o paoues lenn al lizher kaset gant an Ao.O. eus Brest. Un toullad ewezhiadennoù ne rin kén, ewidomp da c'halloud kenderehel gant un divis hag a vo frwezhus, sur mad :

— Kudenn Vreizh n'eo ket ur gudenn sewenadurel nemedken... Daoust dehi da vezañ iwe ur gudenn a sewenadur. Kaer o deus inossantet zo klask lakaad ahanomp da gredif o deus c'hoantet ar Vretoned dileseal o yezh hag o zefzoriou-spered, arabad kredif se... Evel ma n'eus evn ebet o klask chom heb nijal ha mont da vevañ en ur gaoued, evel ma n'eus pesk ebet o tibab mont er maes eus ar mor, n'eus pobl ebet kennebeud hag a zibabfe en em ziberehennañ eus he c'hultur dre he bolontez dehi he hunan. Graet e vez an dilaboù gant ar stadoù : felloud a ra d'ar re-mañ heñvelekaad ar poblañsoù, mougañ ar sewenadurioù dissort... diskrok'hennañ ar pobloù.



— Kudenn Vreizh, araog peb tra, zo anehi ur gudenn demografeg. Evel ma vez lâret alies : « Kudenn Vreizh zo anehi kudenn da-zont ar re yaouank ». Ha peogwir en em ziskouez an Ao.O. gwall ampart war ar jedif, eh alian anehañ da daol pied ouzh kresk-digresk ar boblañs-labour (population active) abaoe ur c'hanved bennag. Dipitet e vo marteze.

— Kudenn Vreizh zo politikel iwe : gwallour ar mare du a laka spiann pegen gwastus ha pegen drastus eo ewidomp

bezañ diveli.

Setu ar fedoù : hor sewenadur freuset, hor yaouankis o teuziñ, ar c'hreisennerezh politikel o ren. Ha dirag ur vossenn a sort-se, petra o deus graet pennoù bras ar 5^e Republik ? Ober fae war ar Vretoned ha netra kén :

— 1962-3 : farsadenn al Lesenn-Stur (Loi-Programme), ul lesenn bet goulennet koulskoude gant ar gwellañ arbennigourien, ha bet harpet gant oll nerzhioù Breizh da adsevel, kuit da vezañ re goustus.

— 1977 : « show » Giscard e Ploermeil. Anad eo n'en doa netra da gennig d'ar Vretoned, en divaas eus an « Unander broadel » hag ur « Chart Sewenadurel » goullou.

— 1978 : ar mouezhiadennoù. Petra o deus kenniget danvez-dileuridi an tu dehoù d'ar Vretoned ? Pessort program ewid ar vro ?... ken e oa 'red dehe spontañ ar speredoù : ar PCF, ar Skolioù prevez...

lakaad anehi klokoc'h e rin daou c'houlakadur :

a) Lusket eo ar Vretoned gant un ezomm neurotiek a surentez. Gwelloc'h e vez gante mont e span dindan disglawier ar Stad vadoberus, a gennig dehe an IVD, ar « Sécurité Sociale » ha pafision ar re gozh, eged stourm da vezañ emren. Ar psikiatourien a oar pegen gwir eo an dra-se ewid an den (ar film *Family Life*, da skwer) : perag ne dalvezet ket ewid ar gevredigezh a-bezh ? Dreistoll o vezañ ma teu ar Stad gant he frossaou dibaoues da lakaad ar peuc'h er c'halloud ha da sioulaad an enkes : prezhenn ar Jeneral e 1969 hag e « borzh-tireoul Brest »... an « usisoù » owez, an hentoù-houarn gwellaet, ar gourbentoù hag all... heb ankouas an diskan nevez : « n'eus ket kistion eus kreisennoù nukleel e Breizh »... daoust d'an « diou- ver a energiezh ».

Seblantadur a ra e Ao. Philiponneau kredif ar rizeadenn-se, er bloaz 1962, pa lavas : « Hag e kav gwelloc'h ar Vretoned »... hañ o bugale eged o marc'hadur ? ».

b) Euzhañ lakaadur all ma kredan me ennañ : « Hag a vez bewet ne vez ket dre re-mañ ». Zoken e c'hell an touflez bezañ lakaet enno.

Possadur ar Vretoned bezañ gwasket, bezañ ochekaet war dachenn ar sewenadur ekonomiezh, ar vuhez kevredel (ha me 'oar), heb dont a-benn da gompren e pessort degouez eh en em gavont. Evel-se o oa kont gant ar viche-nourien da vare Marks, neketa ?

Lakaad serjiou ar Vretoned da glotañ gant o buhez, setu unan eus pailioù kentañ hor stourm, ul labour hir ha kaled, hogen peñ diouzh bezañ difrezeg.

Ul lizher all zo bet kaset da OF : heni P. Ar Gall ha F. Kerrain. N'eo ket bet embannet kennebeud :

« Da gentañ n'eo ket hebbén war dachenn ar sewenadur eo gwasket ar Vretoned, med iwe war heni an ekonomiezh.

Forzh penaos n'eo ket bet gwall zemo-kretel ar votadegoù :

— Lakaet eo bet re an UDB da v/4 marginaux, gant OF. Neuse e vez red bezañ youlet a-benn votif ewid sort tud.

— Dispignet he deus an UDB, ewid 17 danvez-kannad, nebeutoc'h ewid ar pezh en deus « koustet » an danvez-kannad hebbén d'ar strolladoù bras.

— Ouzhpenn-se n'he deus ket bet an UDB ar gwir da gomz en tele. Red e vez kennig 75 danvez-kannad ewid gelloud komz. Diaes e vo d'an UDB neuse — ha da viriken —, pa n'eus nemed 33 fastell-vro e Breizh.

— Souezhus eo e tiskwel an Ao.O. bezañ estonet o weled ez eo e kër ez eus bet ar muiañ a dud o votif ewid an UDB... Da gentañ, ez eus estroch ewid brezhonegerien o votif ewid an UDB : da eil, ez eus tud o votif ewid an UDB daoust ma n'ouvezont ket a vrezhoneg — petra bennag ma ouvez o zud —, hag e santont pegement e ra diouder dehe.

N'eo ket gwir ez eus kalz nebeutoc'h a dud diwar ar maes o votif ewid an UDB.

Kemeromp da skwer pastell-vro *Lannou-Pennoull* : eno he deus bet an UDB 2,75 % eus ar mouezhioù, well-



wazh. Eus ur barrous d'eben ez eus bet diforc'hioù bras : E *Konfort-Berchad*, 135 a voterien, UDB : 11 % ; e *Paul-douran*, 102 a voterien, UDB : mouezh ebet. Amañ n'eo ket anavezet an UDB ; aaset eo da gompren, pa n'eo bet gweliet war an tele nemed 14 munut en ur ober 14 vloaz. Er barrous all er c'hontrol, ez eus un den eus an UDB, kusulier en tikêr, kelenner, kelfredour (intellektuel), hag o c'housoud brezhoneg koulskoude, hag aet e-barzh an tikêr gant 90 % eus ar mouezhioù. Hag e peb lec'h ema ar memes tra. Ur strollad yaouank eo an UDB ; n'eo ket stank awalc'h an dud enni c'hoazh ; n'o deus ket gallet re an UDB lakaad o strollad da vezañ anavezet e kement korn zo, dreistoll pa 'ho ken diaes dehe bezañ gweliet war an tele, klevet er radio, ha lennet o fennadoù war ar c'helaouennoù bras.

Bezañ zo un dra hag a ziskwel ne chom ket disablant ar vrezhonegerien ouzh o yezh : berzh a ra ar skolioù *Diwan* ; bez e vez tud a-ziwar ar maes o kass o bugale dehe ; diwar ur skol nemeti warlene, ez eus 5 pe 6 bremañ, ha n'eo ket hebbén en Breizh-Izel, med e Roazon iwe ; rag an droed o deus an oll Vretoned da gomz o yezh, n'eus forzh pelec'h e vezont o chom.

Kredit, Ao.O., ez on leun a fiziñs e-barzh pobl Vreizh, hag ez on sur e teuy a-benn da vired bew hag he bro hag he yezh.

Ma ! Trawalc'h ewid hiziv. D'an 19/4/78 o deus gallet ar re a lenn OF aketuz, gwelid ul lizher all, bet kaset d'ar gelaouenn gant ur serren GM, medisin e Roazon, unan hag en deus votif UDB, daoust ma ouie evrad ne yaje ket e kandidad e-barzh. Ya, war gesek ez ay, ha gweliet e vo, ar re a voto ewid an UDB. Ha forzh penaos, evel ma lavar an Ao. GM, gant 20578 mouezh ez eus peadra da gaoud ur c'hannad, ma vefe graet, diouzh ar c'henfeuri (à la proportionnelle).

Nann, ar Frañs n'eo ket ur vro zemo-kretel.

Komanantit da b Pobl Vreizh

Ar gelaouenn bolitikel nemeti e brezhoneg penn-da-benn
B.P. 304 — 29273 BREST CEDEX

Hanw hag hanw-badez

Chomlec'h

a gass e gomanant
Boutin : 30 L (1)
Skoaz : 50 L (1)
Estrenvro : 50 L (1)

Amañ an arc'hant
dre chekenn-bost (1)
dre vandat-lizher (1)
dre chekenn-vank (1)
CCP RENNES 2746-79

(1) Diverkit ar gerioù na servijont ket

Komanantit da Le Peuple Breton

E galleg penn-da-benn
B.P. 304 — 29273 BREST CEDEX

Hanw hag hanw-badez

Chomlec'h

a gass e gomanant
Boutin : 30 L (1)
Skoaz : 50 L (1)
Estrenvro : 40 L (1)

Amañ an arc'hant
dre chekenn-bost (1)
dre vandat-lizher (1)
dre chekenn-vank (1)
CCP RENNES 2366-76

(1) Diverkit ar gerioù na servijont ket

ENKADENN SUL AR BEUS

Gwirroc'h egad biskoazh eo : dre lesennou didruuz an demokratiezh c'hall e chom bac'het ar strolladoù politikel bihan — an UDB en o zoues — en ur ghetto...

An dilennadegoù diwezañ eo am laka da zisionkañ c'hwerwoni, 'm eus aon. Ya, na Petra ! Lakaet o deus anad, ur wech ouzhpenn, emañ bepred an trec'h gant tu an Arc'hant hag ar C'helaouñ Bras. Lorc'henniñ a c'hall ober re an tu dehoù : bodet o deus an-dro dehe an oll viroürin, ar geodedis o yalc'h kreñv, ar re o deus lakaet o ewezh en arc'hant postet en un afer vad pe en ul loeren c'hwlan nemedkén ; ar pennoù beus a c'houlenn an urzh dreist pep tra hag a fell dehe boutañ er bidouf kement dispa-c'her blewep pe bounioui a gantre nes d'o zi ; an dud sioul o devez an rag strofsadennoù ur bed aet en diroll ; ar voterien o deus selaeuet pennoù bras ar barres pe, surroc'h c'hoazh, al fur ar President ar skinwel ! Beteg smikarded zoken zo aet d'o heul !...

Padal, petra bennag m'o deus trec'het war strolladoù al laboureren, hervez ar reolennoù termenet gant Charles Goff, n'o deus ket diskouezet kannadourien an tu dehoù ur finessa dreist-ordinal (nemed Giscard, moarvad).

Pa soñjit ez eo aet e-barzh ur farwell evel Soisson, ur c'hwesher-klogor evel Servan-Schreiber hag un adjutant-teatr evel Chirac, ez eus peadra da c'hoarzhin glas ! Med, petra 'faot deoc'h ? Poues landramus ar ragvarnioù, an treuskreden-

noù, ar soñjesonoù krenn ha prim, al luganou anav (« an den e gountell etre e zent » memes...) ; ur choukerezhspered kaset da benn gant ar c'helaouennoù bras, ar radio hag ar skinwel, kement-se en deus kemeret e greñv war youl ur morad labourerien a laerer digante bemdez-Doue un tamm eurusted...

Hag ar strolladoù politikel bihan, eta ? Ar bodadoù yaouank a zanze ur bed newez ?... Flastret int bet. N'int ket bet selaeuet kalz, ewid gwir, pa n'o doa benweg deraed ebet da dizhould ar bras eus an dud. Petra eo ar c'helaouennoligoù misieg e-skoaz ar vouest hud a lugern bemnos e korn kement sal-debrñ ? N'eus forzh petore yodennag sno en devez mioc'h a vezh eged an amañtañ skrivagner ! Ma, ewelkent ! A-benn an emgann a ousoch, ar skinwel gall an deus atretet tri esel eus an UDB da zisklêriañ o mennoioù e-pad ur c'hardeur... pellig a-raog ar mare stard, eveljust !... Med, livirit din, ped a ouio biken, e-maes eus Breizh, ez eus bet emrenerien eus an tu kleiz war ar renk du-mañ ? Hag er vro-mañ, pere eo ar Vretoned a oar dre just petra eo an emrenerzh, ha petra eo an UDB ?...

Setu e teuan d'ar goulennoù a nij war ma spered abaoe sul ar Beus : Daoust hag-ehv ne labouromp ket en aner, en un doare ? Daoust hag-ehv e c'hellomp c'hoazh krediñ e talvoudegezh ar skrivadur hag e kelaouennezh ar re baour ewid lewisonañ an dud ? Iañ tri c'hard eus ar boblañs, d'am soñj, ne lenn morse ar magasinou politikel. Daoust hag-ehv n'eo ket deut ar poent da soñjal e doareoù-stourm all ?

Mikael Briant

GERIAOUG :

yodenneg (yodennien) : un den ha n'eo ket gouest da zistagañ ervad e c'hennoù evel ma veze yod en e c'hennoù (ger klewet dir-mañ).
danvez : arbarner.
kredadad (kredaded) : sifonion.
lugan (oi) : slogon.
farwell : furlukin gg, bouffon, clown.
lorc'henniñ : bragol.
kontre (a gantre) : verb. ; rodol, dont ha mont, bale en trowardroù.

RADIO - U.D.B.
Tel. (16.98) 80.18.47

KEMENNADENN

Paotr yaouank war e bewar bloaz warnegant a vefe plijet o kavoud kenakrivensed en oajou gantañ. Skrivañ da : Mikael BRIANT, chez Mme SAMSON, Le Bas-Bourg 35830 BETTON.

AL LIAMM

ar gelaouenn nemet o rouñ, 6 gwech ar bloaz barzhonegoù kontadennoù, pennoù a bebi-sori ha keleier.
80 pajenn e jeb niverenn - Renner - Rohan Huon
kemanant - 35 L - Studieren - 25 L
Tel/voez merour - P. Le Bihan - 16, rue des Fours à Chaux
ST-SERVAN 35400 ST-MALO - CCP 5349-06 PARIS

AR FALZ

kelaouenn drimiseg an Emsav diaset gant Yann Sohier, bodet ennañ skolaerien ha kelennerien Vreizh a-du gant ur skol vrezheg ha laik gwirion
Lennit Ar Falz ! Komanantit d'Ar Falz !
(30 L ewid 6 niv.)
AR FALZ St. Ken Ar-Gwez - 29245 PLOURIN-MONTRIOLES
KRP-43-20 H.R.G.A.ZON

Kenavo Pêr Lavanant



Peb heni ahanomp a oar penaos ar yaouankis na vez ket stag ordiñ ouzh oad an den. Anavezoud a reomp awechou, siwazh, paotred ha merched ugent vloaz hag o diakollet dija kement kredenn, kement fiziañs en amzer da-zont, arag bezañ bet garet james an disterrañ stiv ewid lakaad an traoù en o reizh en dro dehe.

Ma ! Ar mignon a so set da goukad e hun diwezafi e bered Ploarec (Bro-Drevez) d'ar 11 a vis Ebrel zo bet dioues yaouank flamm beteg ar fin.

Aet oa Pêr Lavanant war e lezenn e-pad gant e labour kelenn brezhoneg, e-maez ger e oa ganet Brezhoneg. O c'hoazh Pêr Lavanant e varo, Brezhoneg en e sav. Brezhoneg en e sav !

En un amzer ma ne oa ket brezhoneg e skolaer lik, diskouez karantez ouzhpenn e gawell, ez eo bet Pêr Lavanant eus an doue nadij tud kaloneg-se o deus lavaret nann ! d'ar re a felle deho lazhañ kultur ha spered hon bobl.

Ouzhpenn tregont vloaz 'zo e oa o kelenn hor yezh en dro dehañ. Ha n'en deus ket bet distriet biskoazh. Ma roe kentelioù heb bierm da skolidi ha liseadenn-Strig-Briag ha Lannou, gwelet 'veze iwe beh hafiv o tegouezoud ingal e stajoù Ar Falz. Hag ase e kemere iwe, sioul ha didrouz, e lod eus al labour.

Sioul ha didrouz. Ya. Pêr Lavanant n'eo ket bet biskoazh ur c'hlasiker-enorioù pe ur c'hlasiker-brud. Ur c'hlasiker-justis hag ur c'hlasiker frankis ne lavaran ket. Ur c'hlasiker breudeur o-mesk an dud dreist-oll. E skolidi, e ziskibien, e vugale omp bet toud, tamm-pe-damm, ha n'omp ket prest da ankouaet persort kentelioù don a oa c'hoazh en e voutc'hoarzh habask ha madezhus. Tud a sort gantañ ne vezint ket re niverus biken en hon toues.

Yann-Ber Piriou

Daw eo gweled a-benn krediñ...

Kêr zo gouzoud n'eo bet ar pennoù bras nemed hanter tud ha c'hoazh ! — gant afer an Amocou Cadiz, stoket e vezer pa 'z aer da selled a-dost...

Lavaret en deus graet Reun An Oatiz, ur c'hamarad deomp eus an UDB, d'an depute kozh de Poulpiquet e vefe red dastum toud al loustoni-se gant al loa vihan : ar wirionez a oa gantañ, war boues nebed.

N'eo ket heñvel an ton hag ar son e-barzh an afer. Becam hag e re a gav gwelloc'h brallañ ar c'hleier deho o-hunan. Kenkas na vefe ket kavet kloc'hier ebet d'henn ober. Ewito ez a mad ar jeu. Ewid a re a vez o tasmus ar mazoù, ar volontered hag ar soudarded, n'eo ket heñvel an diskan tamm ebet. Ne vez gant nemed ar bal hag ar rastell. Ha pa 'n em gavont e-barzh ar rzier, e reont al labour gant o daouarn. Ya, gant o daouarn, war boues ur re vaneoù kaout-chou, gwir eo, med memestra !


D'ar sul 16 a vis Ebrel, goude pred kreisteiz, war dachenn rzier Santes Marchand, parres Landéda, ez ae ar gaos en-dro etre ar soudarded deuet eus ar Jura da zispegañ a-zwar eus ar rzier krien du ar mazoù, hag un nebeud eus ar vro.

En amzer tamm labour divalaw eo he-mañ, gwelet etra a gement a vez prietlet a-fesson gant ar pennoù bras. Jentil tre eo tud ar c'hlasiker-anoemp-ni : dont a reont da ziskouez gant o anaoudegezh vad, o tegass boued gant o zehriñ, kafe hag all ; pedet e vezont gant d'o gweled d'o zier. Med ne vezont ket a-benn d'o c'hompen. Kavout a reont anehe sujet, ha prest da blegeñ ar rzier. En o flass ez afemp ni kalz misadur rzier.

Ni avad n'omp ket kountant tamm ebet. Ober ul labour ki a reomp, hag e vezont skandalek dalc'hmad gant hor superioù. Teir sizhun no emzomp o turkañ, ha permission ebet. D'an nos e vezomp oblijet da zont en-dro da zeg eur. N'eus ket moien mot d'ar sinema memes. Petra 'n dioul eo ar vicher-mañ ?

Petra ? Marteze e gav gwelloc'h re ar gouarnamant ne vefe ket re a zampredoù etre ar soudarded ha tud ar vro... Piv' oar ? Ha ma en em lakie an dud da soñjal, d'en em c'houlen ?

M.T. Laot



استقرار لا سلام
قبل العودة والاستقلال التام

Tressadenn Saharaoui, enibarnet gant ar Polisario : n'eo ket ebu ar stourm-se e-houezh.

Objektivezh ha rannvroeladur er radio tele

Diwar ur gemennadenn kaset dimp

gant **Radio Tele Brezhoneg (RTB)** :

Denoñsiñ 'ra RTB an diouer bras a objektivezh a zo bar radio tele. Breujoù zo, e-kerz stourmad ar votadegoù diwezañ, zo bet lemet diwar roll ar programoù, daoust dehe da vezañ prest ewid bezañ bannet (da skwer, ar film diwar-benn disemglew diabarzh an tu dehoù, bet lemet diwar program A2 gant an Ao. Elkabbach).

Ewid ar breujoù en brezhoneg, dre ziouer a amzer da zispegañ o soñj, eo bet red d'an danvez-deputeed krennañ war o c'haos, beteg brastressañ en ur stumm dreizeh o programoù. Ase c'hoazh e vez strishaet ar frankis war ar gomz bar vro.

En desped d'ar pezh en doa laret President ar Republik e Ploermeur, n'eo ket bet possiùl da FR3 aosañ breujoù etre danvez deputeed ar 5 departamant, da euriou a selouar bras. Ar c'hreiserennerezh eo zo kaos deus se. Klewoud ha gweloud an Ao.Ao. Germeur, Peñseg, Bekamm, Cressard, Herve, Leizour (da skwer) o

eskemmañ o mennoioù war amzer-dazont sewenadur, pesketerazh, labour-douar hag an industriañ e Breizh a vije bet emsavoñ d'ar Vretoned, e-lec'h selouar dalc'hmad an Ao.Ao. Chirac, Barre, Marchais, Mitterrand, h.a.

Goulenñ a ra RTB ma vefe savet gant FR3 Roazon ur breud etre an deputeed newez aet e-barzh, diwarbenn al lan du. Distreset ha disterraet eo bet ba mikrotoù ar radio-tele e broadel, e fed ekolojikel hag ekonomikel an darvoud-mañ.

Goulenñ a ra RTB ur wech c'hoazh :
— ma vo ur greisenn radio-tele o reif abadennoù ewid 5 departamant Breizh ;
— ma vo graet abadennoù kenkoulz e brezhoneg hag e galleg ;
— ma vo meret ar radio-tele en un doare demokratel gant tekniisianed hag aserien-abadennoù, dileuridi ar mererezh, dileuridi an emsaviou ha strolladoù kerredigezhel bras ha gant selouerien-sellerien.

RTB, BP 15, 22301 Lannouen-Cedex



Proh. Vreizh

LIZHEROU



Gounezet ganin un tamm arc'hant goude bezañ bet padur pennad dilabour, eo an ewid adkummanter d'ho kriadenn.

Wid pezh a sell ouzh douar Pobl Vreizh, he c'haouad a ran « kinnigou kentañ » war an da-chenn dekl, daoust ma ne oa ket red ober gant gweiliad danvez-paper egwid ar moullañ e galleg.

Wid pezh a sell ouzh ar yezh implijet enni, ne glemman ket, daoust ma vez forzhig a c'herioù c'wezh ar galleg ganto awechoù.

Da skwer, PV n° 96 p. 3 : « ne oa ket oblijet ar maori da reus ur permi sevel-ù ba al lec'h-se ».

Ahendall, war an dachenn ideologel e vijen plijet o weid muioc'h a bennoad o reñt da anaoudezh mennoù UDB war ar gevredigezh da sevel warc'hoazh e Breizh.

Gourc'hennouad.

Ur c'hemmanter deus Lakourann

Ya, presentabl awañ he eo Pobl Vreizh, a gav dimp ive. Biez ar galleg war yezh ar gefouenn awechoù ? Ur wech ouzhpenn e lavaromp n'eo ket gant gerioù heñken e raer ur yezh : sellit d'ho c'hoestrog : un hanter deus gerioù ar yezhoù zo galleg, romaneg, pe latin a orn. Bred eo Anaoudezh ar c'hemposet ewid : pouezh ramp war an tu-se. Bremañ, ewid mennoù an UDB, preñt he lenni Program Demokratel Breizh : da c'hoarzh ken ma vo muioc'h embannet rammoù anezhañ war b'Pobl Vreizh, ne vez kavet da bremañ ha da lenn nemed e galleg. Sur omp n'eo ket ar dra-mañ ur skoilh ewid hon komaneter.

Pobl Vreizh

LESHANOIOU

Kass ur pennad din, eme Fahch. Unan politikel.

Ma, en dro-mañ, yañ, e vo sevenadurel adarre. Ha d'ober ur gouleñn bras ouzoc'h. Daoust hag umour brezhoneg zo ? Pootramant tud faruz ?

Arag deoc'h ober ho soñj, sed un nebeud leshanoioù eus Landivizio. Tud hag a zo a bew law » pe marz peñt zo. Diwar 94 eus ar barrez-mañ. Hag ar re-mañ eus tost da zreg mil, eus tost da zraou c'hant parrez. Se ewid ur desenn skol-veur emañ o preñtifi, ha n'eo ket achu an enklask...

Preñt ar Skol da gentañ. Doujañs e leizh o flijet o deves. Lezenn ewid o relijion, fars yañ. Ma, ur frer rener zo a vese graet Sae'h-Lex anezhañ. Bremañ, pe e oa ler pe traod all, n'eo ket bet o weid. Ur frer all a vese gwisket fard dalc'h-mañ, ha leshavec'hwed en Tallez. Un all a oa Kefeg Dour, goude ma yalc' traod all e-barzh, hag e oa e hanw mad Gloada Prad, ur skrivagner brezhoneg anezhañ, mar plij.

Ur gresk kommander en Landi. Mont a c'hellec'h da di Madan, Petao, a zalc'h un ostaleri e lec'h ma v eus brezhoneg, anad



Pobl Vreizh

deoc'h. Pe da di Karga Dou Del, a werche stal-kerezh e ru Vrest. Hemañ emichaf eo d'an tu all eus kêr e yas da gargañ, e ru Baris, e ti Michel Penn Mace'h a zalc'he ur restorant 'oa ur penn mae'h botarn stag ouzh tabenn an ti ma edo.

Micherioù bihan a-leizh a oa, artisañned en o zoues, evel Sant Josef, a oa un den passe deved ha blew hir dehañ ouzhpenn, egi ar sant na lit, doueuz bras. Un all a yas da zwerzhiañ, med ne lavarfe morse e pelec'h : « A'ta, Jakou, hag e pelec'h 'maou 'labourad hiziz ? » - « O, me zo partinet », responte ef. Pe edo pe n'edo ket, ne vese kén graet Jakob Partoued anezhañ.

Diouzh e vicher eo anaoude an dud eweljust. An oll, tre-dro da Landi, a anavez Fehch ar Pataes, a zo emeller legumachoù. Hag ur viciocig kouli ha dister n'oa kén Katrin ar C'hoeb. Pourmen dre gêr gant unan a rar pa vese ewid ar c'hristien ha kaos da interfi e eskizh e lec'h ma vefe ferd deho.

Marvez ar Bilestou zo lezenn saout o c'hlaeke d'ober soubenn ganto. Se ar Fann Lous avad n'eo ket abalamour bezañ loudour. Distiwet edo ar paour-kac'h den, hi divalav da weid.

Ar c'houarnerezh eo a sav 'oa diw gamarades hag a servije en un ostaleri. Chom da gornoad ma n'ije ket re oll deho. Ul lastez ardoù bezañ fardh gant a labour a raent da gass kuit ar praktikoù diwar-h.

Marc'h-lid an Douz Benn n'he doa kén unan, war he c'wekour da vihannañ, med, e-lesson, eo c'hañficid spontus. Fehch e Vusell avad en doa diw. Pety' zo, unan anebo a gube ebenn dalc'h-mañ, ken bras all edo.

Yann Beder 'oa un denig didrous. Med peder merc'h en doa, hag e vese fougeat ganto. Med oll zo a lavar en dia bet peder gweg, ha n'eo

ket an eil warlerc'h eben e vefe. Toodoù fall eweljust.

Ur vanues kock, mamm da deir blac'h, a gunte ar rimad-mañ.

Pêr ar Rider, Chamae al Lampier, ha Chedig ar C'wezh'er, a zo tri breuz kôer.

Hag e ont ive, diminet d'ho merc'hed. Daou zo marz, med gwelid 'vose 'law Chamae o lampad dre ma vade dre gêr Landi, n'eo ket peñt. Ar c'wezh'er (= kac'h), ne ouezan ket pennez e oa an egi garet da gant e leshavec, med ar rider edo kemañ e vicher (souneg) mont war gweg e rar, kwa).

Hag un tamm galleg bremañ. Itag Landivizio n'eo ket deket ha n'eo forzh pennez kof vod badinet a zo er vro. An anaoude an oll Bess 'vose anezhañ ne vese kén an c'her-mañ e gant stad. Ur c'hlaeke ewid edo, a stous da anezhañ e gant c'hoestrog ar gant.

Un all, bet o savet e gant stad, a gant graet revid oll, rag anezhañ e gant da vevet, n'eo ket anavezet e gant F. Gw. Gw. eo e reo se da anaoude d'ho stad sul d'ho stad, dre ma reo 'vose k'hoestrog bremañ anezhañ e fri, hag anezhañ e gant c'her-mañ.

A, gant ! Ur pennez politikel a lavare Fehch (leshavec'hwed) Pobl Vreizh, niver ar c'herioù pe dast, en doa 'vose ar vevet, ma oa bet). Desomp da gant-lesson, e keroc'h neuse, e lec'h ma e us ur famill, peñt did a vez graet ar Chamae anebo toud, e lamour int tud eus an ti deho, tre. Ha keri, ha pizh, ouzhpenn. Ewid deare, n'eo ket ur soñj revid oll eus paotred ar Galon Sakt en tuad, daoust d'ar pezh a skrive Lan Inizan.

Mikael Madeg



Garnot

Un huñvre e mis Meurzh

Iselenn ar gouleñn tro-war-dro d'ur mell e vese difriv drag Porsal.

Klask ar gent, evned paour, ul lec'h d'en em lezenn war ar mor. Gwazh-a-se d'ar re a zikenn ! Ewid sevel n'int kén. O c'hlevoud a ran bepred o krial, o hirvoudiñ, o ouelafi, o c'houlenn skour digant o c'heñtered, Koc'honet-breiz m'eo o c'horf gant an oul fiberius em ar pikol loen, gourvezet ase war ar reier, o tisonkañ heb dihan eus don e vouzellou milliget.

Fonnis int mouget, ha kass-degaset o c'horf maro gant red an dour beteg an aod, hag ase dastumet ha taolet war an tell, pe deved ewid ur c'hoazh tamm koad. Pennfollet ur pouasdig, ar re chomet

beu ha divac'hagn e teu deho ur soñj : kass koad d'o mignoned hag o fadifi d'en em gavoud heb dale war ur roc'hell vras, dehi stumm Breizh, ewid en em glevoud diwarbenn petra ober...

Daredet int oll : ne vank heni. Goude ur glemnadenn a garv d'o breudeur Kollet, hir ha hirvoudus evel, gwec'hall, heni alere : h lwerzhon war lenn Moyle, e kemerant an hent.

O askellou, a-stok an eil ouzh eben, setu he o nijal wardu ar sav-heol, etresek ur gêr ma 'n em gav un dornad pitaoded kofeg, bastroulherien digalon, enoret-bras, na raont forzh ebet gant buhez an evned, nebeutoc'h c'hoazh gant poanioù al labourer, koulz re an douar ha re ar

mor. Mont a raont, a-dreist stankenn, a-dreist tuchenn, da ober deho ur wela-dennig ewid skillañ war o fennoù moal an druzzañ ha flêruissañ forell bet diwanet biskoazh e reor ur gouleñn, ha miret pizh ewid ar gastou-koc'honerien-se.

Achu ma huñvre... Pefezh fars ha laouenedigezh ma teufe da wir, un deiz, fin ma huñvre, ha ma vefe, d'o zro, lardouset an oll vas-trouilherien, eus an nec'h beteg an traoñ, gant daou c'hant mil karrad kac'h-gouleñn !

Merc'hig Langoned

DEWEZH AR VRO
e Moustifort-L'Amaury 78 (Yvelines)
- 20^e : ofernenn e brezhoneg
- 21^e 30 : fest-nos vras, d'ar sadorn 10 a Vevzeven 1978
- D'ar sul 11, adaleg 15^e : fest-deiz

Kaset e oa bet deomp gant ul leñner **Gwerz al laou de**, ur werz bet savet gant PM Mevel. Embannet eo bet ganeomp e skrivadur ar gelbouenn : graet e vez kemend-all ewid an oll skridoù, barzhonegoù, lizheroù a vez kaset deomp. Eveljust, pa embannomp skridoù bet savet gant tud n'emaint et e-barzh an UDB, ne sinif ket an embann-se e vefe an dud-se o-du ganti. Anvav a reomp e c'hell peñt heni anezhañ kaoud e zibaboù hag e frankis politikel. Ha diwar ar frankis-se e c'hell neb o goro bezañ memes a-eneb d'an UDB.

Pobl Vreizh

Paperenn ewid gouleñn mont e-barzh UDB

Hanw hag hanw-badez :

Chomic'h :

Gouleñn a ran moned e-barzh Unvaniezh Demokratel Breizh
D'an (d'ar) : 19

Sin : Da gass en-dro (trac'h et pe adskrivet) da
UDB B.P. 304 - 29273 BREST CEDEX



AR GWALL-DAOLIOÙ,

PLANEDENN VREIZH ?

Beb an amzer e vez kavet ur « c'halwidigezh » da Vreizh : an douristed, an arme, h.a, h.a. Rag en diavaes eus ar Vretoned eo e vez diviset e Paris diwarbenn o amzer-da-zont. Ur vro sujet, chadennet ha pennasket eo Breizh : peb heni eus lennerien **Pobl Vreizh** a oar kement-se ervad. N'hon eus galloud ebéd, hag e vez graet peb tra en diavaes, ha peurlieasañ, a-eneb deomp.

Ma 'z eo roll ur gouarnamant « ragweled », e c'heller lâred hag embann a vouezh uhel ez eo gouarnamant ar Frañs unan diefedus, dic'halloud, ha didalvoud kenañ ewid pezh a sell ouzh Breizh. E gwirionez, n'eo ket gouarnet ar Frañs. Lakaad a ra ar gouarnamant, an adminis-

trassion anehañ, he fri e kement tra zo, med gouverniñ ne ra ket. N'eo ket aet d'an traoñ na brud na boasioù ar « c'haporal bihan ». N'eo re ar gouarnamant nemed ur gompagnunezh adjutantad kozh, o selled pizh hag-efiv ne chom tamm paper lous ebéd war borzh ar c'hasarn, med n'int ket ewid ober gwelloc'h. Kozh ha brein eo ar sistem ; ema ar Stad C'hall o roiñ bemdez skwer an divarregezh.

Gant gwall-daol ar mare du amañ e welomp fraezh pegen diwezad eo gouarnamant ar Frañs. Ya, dres evel ma vez laret eus ur c'hrouadur ez eo diwezad. Ar fri war fass un den a vez gwelet kerkent. Ma ! Kerkent ha ma c'hoarvez un dra bennag dre amañ, e weler iwe splann ne dro mad tamm ebéd rod ar sistem.

E Brest ema ar marin « broadel », ar prefed a var, arsa, ur bern tud galonioù gante war o mañchoù forzh pegement. Ma ! Petra o deus graet pa 'z eo kroget ar mare du da zont er maes eus reor an **Amoco Cadiz ?** Netra, mann ebéd ! Petra o deus graet, araog, e-kehid ha ma oa ar mell pezh batimant hoc'h ober he c'hoari tost da reier bro an aberioù? Netra. Ase, diwallit, ez eus unan all, o chom e Paris, hag a oar gwelloc'h ewid ar re a zo war an dachenn petra vez d'ober. Daw 'vez gortos, gortos dalc'hmad ken na deufe ar sklêrijenn deus Paris. Red e vez kaoud an aotre, ar « c'houlouenn c'hlas » hag a vez lakaet war elum e Paris eveljust.



Guy Le Querrec-Magnum

Paour-kaezh Breizh ! Setu ase he galwidigezh : ar mare du peder gwech en ur ober 11 vloaz, an dour-beuz e Montrouies hag e Kemper, an arme oc'h ostenn he zachenn deiz-ha-deiz. E Paris n'o deus **netra** da lâred da gemig. Kaporalegezh, tra ke...

Aet omp skuizh ewid gant omp oned ha kanfarted. Mart gant Paris. Anad eo, setu eo netra mallusoc'h. Ema kaoud galloud war an dachenn. N'ema ket, pa vo lâret mad, n'emaomp ket tamm ebéd o tiskar ar Frañs pa c'houlennomp bezañ emren : diska-ret eo dija gant ar re a zo er penn anehi ; ur gompagnunezh tud bouzar, mud ha dall n'int ket gouest memes d'ober chou d'ur yar. O c'houlenn an emrenezh ewid Breizh e nac'homp ouzh re Paris an droed da embann ez omp « galwet » da virviken d'ar gwall-daolioù. Ma seblant planedenn Vreizh bezañ diremed, ez eo abalamour n'eus nemed furlukined e Paris oc'h ober war hon tro. Ya, o klask ober.

Nann, planedenn Vreizh n'eo ket diremed : etre daouarn he bugale ema.



Guy Le Querrec-Magnum



LENNIT POBL VREIZH